

Mamie Blue ! gant Danielle Padel

N'eo ket aes ober gant bugale hiriv an deiz. Zoken gant ar re vihan. Oc'h ober diwar o fenn emaint, o krediñ gouzout pep tra. « Klask da zeskiñ d'e dad-kozh d'ober bugale-vihan » evel ma veze lavaret gwechall. Mamm-gozh out oc'h ober war-dro da vugel bihan bep an amzer ?

Ur mab bihan am eus, tri bloaz eo, oad «ar vugale millgoulenn » evel-just : « Mammig, perak eo glas an oabl ?... Mammig perak e poazh ar wastell er forn ? ... Mammig perak e ra glav ?...» Ha me-oar-me... Goulennoù zo a zo goulennoù gwir : goulennoù war un danvez nevez-gwelet. D'ar re-se n'eo ket anavezet o respont gantañ. Re all zo a zo goulennoù « mestr-skol » anavezet ar respont gantañ : o wiriañ emañ ar pezh en deus komprenet. Ha gwashoc'h e vez gwechoù all. Pa vez ar pal lakaat an dud da gomz evit enebañ outo... Hag eñ da ouzhpennañ war an displegadenn a vez roet dezhañ pe da dalañ oc'h arguziñ : « Papy en deus lavaret din e oa mod-se... » Ar pezh ne vez ket gwir bewech... O priziañ emañ talvoudegezh al lavar, hini ar re all, hag e hini... Un tammig torr-penn eo, ha me da lavarout dezhañ : « O klask lakaat ac'hanon da bennaoutañ, da goll ma buoc'h vrizh emaut... » Hag eñ da c'hoarzhin un tammig doaniet da vezañ diskoachet....

Gwiriet eo an dro lavar : « Hemañ a glask da zeskiñ d'e dad kozh d'ober bugale vihan... » N'eo ket nevez doare ober da vab-bihan kennebeut neuze ! Un diskoulm e vefe lakaat anezhañ d'ober e lec'h komz...

Ar wirionez zo ganit : « Un oberer a dalv kant lavarer ». Ober traou nevez a blij dezhañ, keginañ dreist-holl. Rekiye farz-forn n'en deus kevrin ebet evitañ bremañ... Meskañ vioù, bleud ha sukr a blij dezhañ, tañva an toaz o lipat e viz ivez. Ouzhpennañ goustadik al laezh, unan a skuilh, unan a dalc'h ar plad a zo ur sapre labour : labour skipailh, labour veur, « travail d'épique » evel ma lar eñ e galleg... Ouzhpennañ pruneoz er plad a blij ar muiañ dezhañ evel-just... tost da dañva unan diwar daou e vefe ma lezfen anezhañ ober ! E jestroù n'int ket mestroniet bemdez : un tamm bleud a nij bep an amzer, hag ur vi a zo torret el lec'h ma ne oa ket raktreset met n'eus forzh, plijadur zo, ha me da chom hep gourdrouzañ ! Met evidon n'eus digarez ebet. Pa vez graet ur fazi ganin, da skouer lezel da gouezhañ un dakenn bas bennak war an daol, pe ankounaat tommañ ar forn en araok e lavar ma mabig : « O Mammy, O Mammy, oc'h ober sotonioù emaut... O Mammy, O Mammy... » Ur wech eo deuet d'am soñj ur ganaouenn eus ma yaouankiz, an diskan a zo mod-se : «O Mammy, O Mammy, Mammy blue, O Mammy blue... » ha kanet 'm eus evit respont dezhañ en un doare fentus... Plijet eo bet gant an ton ha bremañ, bewech ma vez graet ur fazi dirazañ e kan d'ar fazier pe d'ar fazierez : « O Tadig, O Tadig, Tadig blue O Tadig blue... » pe « O Mammig, O Mammig... » Pa vez graet sotonioù gantañ, zoken eñ a gan : « O Baptiste, O Baptiste blue...» gant ur mousc'hoarzh... Un doare da vezañ digarezet eo evitañ... Mamm on, tud-deuet eo ma bugale bremañ. Met gant ma mab-bihan e tizoloan traou nevez c'hoazh. Nevesaet eo an dro

lavar gant ma mab bihan bremañ : « Klask da zeskiñ d'e vamm-gozhig blue ober bugale-
vihan... »